

Gabriel Milin (Kastell-Paol 1822 – Enez Vaz 1895)

Barzonegou. Bet embannet e 1902 – 1903

Modernnaet eo bet an doare-skriva

Taolenn

Hirvoudou c’hwero eur skrivagner euz a Vrest.

War Zebastopol.

Meuleudi da Zoue.

Va azen.

An delienn zeh.

Skeud ar vuhez.

Hirvoudou c'hwero eur skrivagner euz a Vrest.

Evid doania Breiziz n'ez eus ezomm ebed
D'o has pell diou o bro d'ar penn all euz ar bed ;
Pellait o heplen diou o hêr, diou o zi,
A-hed nao pe zeg leo, hag int divroidi.
Ya, en eur gêr, e Breiz, me 'gred 'hell eur Breizad
pa vez yah a spered, en em gaoud divroad.
Ha perag kement-se ? mar deo red her lared,
dre ne glev ket komz ger brezoneg ebed,
dre ma wel a-doullad an dud evel merien
en o zouez 'mesk-ha-mesk kalz troidellerien,
ha nebeud a re vad, ar re-mañ ker gwasket
ma rankont yudal forz ; hualet ha pennasket
evel chatal direiz, anezo e reer goap,
Ha n'en-deus ket abeg ¹d'am hredi divroad ;
Eur Breizad er gêr-ze gand an oll distoket,
taolet a-gleiz a-zehou, ruillet ha diruillet
evel eur voladenn² ? ha ne deo ket gwelloh
moned pell war ar mêz da ziwall saout pe voh
eged chom da vreina e-touez loustoni kear³ ;
Daoust ha heller prezeg, 'viodn-me a lavar
e karfen, ya, raktal mond d'an daoulamm ahann,
siwaz ! pa ne hellan, gand neh e lavaran :
Pegeid e chomin-me er vouillenn, el lagenn
am sklabez e kêr Vrest ? ma torrfen va chadenn,
ma hellfen-me tehed er-mêz euz va haoued
e-touez va henvroiz da glask va zammig boued
me 'nijfe a-benn-herr, euruz, drant ha laouen ;
neuze ne ven moustret na stlapet oh torgenn
gand an eil egile. En hent striz ar hargou
ez eus re a engroez, ha mereud va hostou ;
Daoust ma'z on bihanig, ne ouzon ket plega
evid sacha ganen ar bastell disterra.
Re hourt⁴ eo va livenn, heñvel on oh eur bleiz.
Koulskoude en-dro din kalz a dud a welan
o vond en o daou bleg, soublet war o hraban
treuz-didreuz dre an drez, dre 'r spern, der ar vouillenn
heb aon d'en em roga na da goud kaillarenn,
o kerzed oll em raog, o sevel en o za',
hag heñvel oh yer gleb oh en em ziwaskella⁵.
o strinka tr-war-dro o sklabez, o hagal
evid en em skarza. Gra evel ar re all,
a glevan euz he neiz eul labous o lared :

¹ n'en-deus ket abeg : n'ez eus ket abeg

² voladenn : bolod.

³ kear : leoneg : kêr.

⁴ Re hourt : re verr.

⁵ en em ziwaskella : o nijal gand o askellou.

« Breizad,, douget d'e benn ha war ar mêz ganet
 a-vihan on bet boaz, evid moned d'ar gear⁶
 da ober hirroh tro evid chom digaiillar.
 Dre ze e kavan gwell mond dre ar wenodenn
 ha kas beet 'n dalar va zro eeun da benn.
 eged treuzigellad ha c'hoari troadig-kamm,
 hag en eun toull lagenn mond da ober eul lamm.
 Bennoz Doue dit-te ! ha pa ven-me eno
 o neuñv, o paota e-touez ar peg tano
 bete toull va gouzoug, pa ven-me gwakolier
 gand ar fank, gand ar pri, te ziniñfe, me 'gred
 da astenn din da veg, d'am zevel deuz ar prad
 evid tizoud euz va lod,eur bastell, eul loaiad !
 Nann, nann, ne zeufes ket, pa ne zeu brema'
 pa'z on dizaotr, kempenn, ki na deu d'am harpa ;
 ar re a zo skoret a zo ebat dezo
 kas o harr war-raog : bleinet mad eo o jao.
 Evidon-me, siwaz ! ne gavan den ebed
 d'am skora, d'am bleina, ha mar don ankeniet,
 ne deo ket tamm ebed evidon va-unan ;
 hogen 'vid va zorad, va bugale vihan.
 Ma hanfe en oad-mañ dre nerz mad an neñvou,
 eun den hag a rafe din, d'am bugaligou
 euz a-greiz on enkrez mond ahann war ar mêz
 da dañva eur gwir peoh er frankiz euz an êz,
 an den-ze, on Doue, a glevfe dre ar menez
 an hekleo o kana dezañ meuleudigez,
 en-dro dezañ aoterig, greet gand bleuñv ha leton,
 savet oh an dorgenn, euz a-greiz or halon,
 ni oll, braz ha bihan, dreist an heol, ar stered
 Hen trugarekafe bemdez, bemnoz, bepred... !
 Koulskoude petra 'dalv hirvoudi ha gouela !
 evel eun torfedour ; me 'zo staget ama'
 gand chadennoù pounner ! Den ebed ne ra van
 'vid gweled va daelou, 'vid kleved va gouelvan.
 En amzer ma vevom e lezer da weñvi
 eur yeotennig kêz, ha gwaz a ze dezi
 ma'z eo bet euz ar prad gand eur barr avel foll
 diwriziennet, siwaz ! dilezet gand an oll
 e ranko dizehi, rag ne zeuio dorn den
 da skuilla warnezi na lomm na beradenn.
 -Mestr ar bed-mañ hepken, trugarezuz, galloudeg,
 a wel an emzivad a-dreuz war e garreg ;
 astenn a ra e vreh da rei dezañ skoazell.
 Lakaom or feiz ennañ, bevom bete mervel
 war gein an êzenn flour, goustadig hen dougen
 e lez eur bradenn hlaz e traonienn ar grehenn,
 e êlez a ziniñ euz dudi an neñvou
 da skuilla warnezañ en noz gliz ha daelou.

⁶ d'ar gear : leoneg, evid ar rim : d'ar gêr.

Setu-eñ enaouet dre ar burzud kaerra,
 sevel a ra e benn, meuli Doue a ra,
 meulom Doue ivez ; pa ro d'eur yeotenn
 eun diveradennig, ne lezo ket an den,
 e grouadur karet da hlaouri gand an naon ;
 diskouezom her harom ha n'or-bezet neb aon.
 Al labousig bihan a gav bemdez e bred,
 hag evel zo skrivet, morse na had, ne ved :
 o tiskenn euz e neiz, 'hed an hent hebdale
 e kav eur hreunennig da rei d'e vugale,
 ha me, e-touez an dud, ne gavin eur begad
 evid terri va naon nag hini va zorad ?
 na perag 'ta an den, kaer en-deveus hada,
 labourad a-dorr-korv evid en em vaga
 ne zastum euz e zouar nemed gwrizioù c'hwero ?
 Perag e-leh ar vuhez e vedom ar maro ?
 Perag ? Dre ma hadom pep kammed ar pehed
 dre ma'z om tud direiz, gwasoh eged loened ;
 gand ar re⁷ e karfem er menez pe er hoad,
 mond ahalenn da jom da viken evid mad :
 ha ne ve ket gwelloh peuri geot ar prajou
 chaokad kaol pe irvin, panez, pep seurt louzou
 evel eur penmoh gouez 'turiad divinouer⁸,
 evel eur marh dishual, digabestr, dibreder,
 heb anon d'en em vouga ha da voned gaou⁹ ;
 gelloud astenn ar harr, digeri 'r fronellou ;
 beza e-kreiz eur fraost, dizoroh¹⁰ ha diboan,
 eged beva amañ evel eun amprevan
 a rank en em ruilla, hep sevel oh harzou
 en hanvouez hag er pri, mond war e varlochou,
 ruza evel eun naer ne hell doned a-benn
 kaer en-deus en em drei da deuler e grohenn,
 eged beza flastret, pigoset gand an oll
 a bil a-nerz o horv warnon gand kant morzol
 evel war eun annev e-barz eur hovel.
 Beza... gwell eo tevel. Displeget, va askell,
 ha n'hellin dizale, evel eur goulm, nijal
 euz ar gêr-mañ, ker bah, ken hudur, ken teñval
 ma'z eo bet dibabet gand abeg d'eur haleour ?
 Pa dorro al liamm a stag va ene paour
 oh Brest, an eil ivern, va halon a drido ;
 neuze gand levezet diouti me 'gimiado,
 me 'gerzo, me 'redo buanna ma hellin,
 disheñvel diouh gwreg Loth, war va lerh ne zellin.
 Diouzin eh hijin, e stlapin an truillou
 a hrahellan¹¹ gand kalz loenedigou¹².

⁷ ar re : pere, er skrid orin.

⁸ divinouer : herb minouer.

⁹ gaou : **notenn gand an embanner** : en em vouga.

¹⁰ dizoroh : **notenn gand an embanner** : heb sorohal evel ar moh

¹¹ a hrahellan : a dolpan.

Nann, ne gasin ganen na koloenn na spillenn
evid ma teuy din koun euz aVrest birviken ;
neuze, en noaz grizill¹³, a-drugarez Doue !
eh hellin, skañv, redeg buan, kerzed, bale ;
neuze me 'lavaro : Kenavezo Sodom
n'am gwelez-te biken, ar skorn a vezo tomm,
meneziou Breiz-Izel, he reier, he herreg.
pa zistroin da Vrest, e vezo boug 'vel peg
hag ar gêr vraz a Iz, pell a zo dismantret,
a vezo war an aod gand ar mor dislonket !

¹² gand kalz loenedigou : **notenn gand an embanner** : war gein loenedigou.

¹³ en noaz grizill : hanter-noaz (noaz evel ar grizill ?).

War Zebastopol

Kemeret gand ar Hallaoued an eiz a viz Gwengolo 1855

Mammou keiz, sehit ho taelou.
Mar 'deus¹⁴ tennet euz ho tivreh
Evid kas d'an emgann ho kwir vugaligou
N'o gouelit ket, marvet int treh
Marvet treh d'o enebourien,
Doue evid o gober en-deus er Baradoz
Roet dirag e zent dezo o hurunenn
O lavared : me ho kortoz.

Bro-Hall, te, bto halloudusa
Sao ! Sao da benn uhel ha laouen !
Da vugale o-deus tumpet ar gêr greñva`
A-dreuz war o enebourien.
Displeget gantañ e askell,
Bro-Hall, sell oh da Er¹⁵ o sevel en neñvou
Gand sked evel gwechall e stourm oh an avel,
Bezom oll 'ta laouen... Koueza a ra a-beziou
Maout ar gwalarn¹⁶, enkreiz ar bed ;
E-kreiz e dal, a-bell tizet
Gand an taoliou spontuz euz or breh galloudeg
Euz a-dreñv, diskorn¹⁷, mezeg.

A-bell zo ar Rus mahomuz
A lemme yud e ivinou
D'o hrenna 'z eus kaset a Vro-Hall tud nerzuz
Tud a benn, stard o arzornou.

Treh int... nij, Brud, gand levenez.
Nij, nij a-denn-askell da embann dre ar bed
E kanaouennou drant, nij heb aon da ziskouez
On-eus nerz ha kalon, oh-ouzm, pa vez red,
Rei freillajou 'hed or gwalenn
D'ar re a zao re uhel o fenn.
Sked an oll Hallaoued a lufre evel an heol,
Diskaret eo Sebastopol.

Kanoliou, kroizit dre ar bed,
Savit ho mouez, livirit uhel,
Dreist soudarded Vro-Hall n'eus soudarded all ebed¹⁸
Da drehi prim pe da vervel
E-kreiz an tan, du poultr, leun wad,
Ne oufed kaoud o far da skei stard a-drojou¹⁹ ;

¹⁴ 'deus : 'z eus

¹⁵ Er : Erer.

¹⁶ ar gwalarn : ar gwall-amzer.

¹⁷ diskorn : beskorn.

¹⁸ n'eus soudarded all ebed : implijoud a ra al liester gand "ebed".

¹⁹ a-drojou : a-dreuzou.

En o gwazied e red, e verv, a oad da oad
Eur gwad, yah ha nerzuz, a ziskar ar hêriou
Pep kamm a ra war an dachenn
E kouez a-stok enebourien
Evel er parkeier e weler ar pennou
War-lerh ar meder a-zrammou²⁰.

Treh om, gonezet ar Hrime
Dre on nerz, dre skoaz an neñvou ;
En eur gana eta meuleudi d'on arme,
Kanom da Zoue meuleudiou.
Eñ en-deus warnom astennet
Dre drugarez e vamm, e veh vadelezuz ;
Eñ 'zo deut d'or skoazia pa on-deus her pedet.
Skignet en-deus enkrez e kalon yen ar Rus
Pa'z eo gwir daoust d'e vaillantiz
En-deus ranket mond war e giz.
Skignal a ra e zent a-dreñv e gein pa wel
War Valakoff, sonn or banniel.

Banniel or bro, arouez eüruz,
Gwechall douget en emgannou
Etre daou benn ar bed gand eun dorn gallouduz
A-eneb avel ar broiou²¹
Hep kosteza distro, displeg,
Bremañ evel gwechall e flastr enebourien.
O weled gwad e dud a-steriou o redeg
E skuillo daelou druz ar Czar leun a anken,
Abeg en-deus da lavared
Dioh va fehed on kastizet.
Ra vezo peoh er bed, ra zistroio raktal
Dre nerz ar banniel a Vro-Hall.

Gwelloh eo peoh eged brezel ;
A-barz terri eo gwell soubla,
Na petra 'dalv d'ar Rus klask ouzom-ni herzel,
Pep taol tourt²² e rank argila ;
Ar Hallaoued hag ar Zaozon
Hep selled war o lerh 'zo deut d'en em skoazia
'Vel daou vreur a-unan, Pelissier ha Simpson
A-berz ar vistri vraz, Napoleon, Victoria.

O skei a-du 'vel daou vorzol
O-deus pilet Sebastopol.

²⁰ a-zrammou : e drammoù.

²¹ A-eneb avel ar broiou : **notenn gand an embanner** : Il y a ici une allusion à l'aigle qui lutte contre tous les vents (voir la 2^{ème} strophe).

²² tourt : arsail.

Meuleudi da Zoue

(Greet e Santez Anna ar Porzig, ar....)

Ahalenn e welan ar mor o rodella²³,
O ruill oh an aod gand krozmol e wagou²⁴.
A vern 'vel meneziou,
A-zioh ouzin e klevan eun eostik o kana ;
Euz eur vodenn gelvez e sav e vouez dudiu
Louen ha truezuz²⁵.
Mor braz, labous bihan, livirit din da biou
E kanit en ho yez kemend a veuleudiou ?
Da Zoue an neñvou,
Or mestr hag on Aotrou.

Ha te, geotennig hlaz, te diskaret ama',
Emzivadennig kêz, etre fraill ar garreg,
Eul lommig glizenn hwek
Hag an nebeudig douar a ra dit-te beva.
Perag e soubl da benn, perag e sao goude ?
Evid meuli Doue
A zegas d'am floura, alan domm an êzenn.
4vel ar mor, an eostik, evel ar yeotenn ;
Kanom, soubloum or penn,
Meulom Doue hepken.

Ni 'zo e vugale a vag gand largentez ;
Ar penn-ed evidom a skrij war e gorzenn,
Evidom ar wezenn,
A astenn he skourrou da rei skeud ha frouez ;
Evidom-ni an heol a sklêrijenn ar bed
Ha pa'z a da guzed,
Ker stank ha trêz en aod, e bolz an neñv, laouen
E trid an oll stered ; evel kant goulaouenn
E strinkont sklêrijenn
'Hed an deñvalijenn.

Nag a draou, va Doue, hoh-eus evidom krouet
Er mor ha war an douar hag en ho paradoz
A zo ouz or gortoz !
Dioh ar bed-mañ c'hwero, distagom or spered ;
Evel an alhweder, displegom on eskell,
Nijom war an avel ;
Dreist an heol, ar stered, savom or halonou,
Pedom Doue, e vamm hag e êledigou
Da drei on oll boaniou
En eur mor a zudiou !

²³ rodella : terri.

²⁴ wagou : wagennou.

²⁵ truezuz : **notenn gand an embanner** : *melkoniuz* serait plutôt le sens ?

Va azen

En deiz all, savet va hribell
Hag a-haoliad war eun azen
Ez een da glask en eur park pell
Irvin evid ober soubenn ;
Pa welas va lipous skouarneg
A-hed an hent e-tal eur hleuz
Eur vodenn askol a lipas c’hwek
En eur chaokad e vrid a-dreuz.

Yao, yao, va azen,
Mar choman en hent da ourzal,
E n distro em-mo ar valaenn
Digand Janedig, digabal²⁶.

Eun azenez koant a dremen
Sonn he skouarn ha glaz he lagad.
Oh he gweled drant, e skrab,
War he lost e sao en eun tenn,
Digor gantañ e fronellou,
Ha me riskla ‘kreiz ar vouillenn
‘Vel eun druillad gwadegenou.

Goude, ‘vid diskouez e baotr-mad,
Va leon a laosk eur fringadenn,
Hag en eur fringal war ar prad
Eh astenn warnon e livenn.

Flastret oll gantañ va hov,
Va hein ‘zo stok oh an douar.
Youhal a ran ‘vel eur penmoh
A gren ar vuhez en ziuoharr !

Pa hellis sevel ezu ar ouer
E oan leun-fank penn-da-benn,
Hag erruet e park ar glazder
E tennis eur ribinadenn²⁷ ...
Va azen sammet a-zebri
Ez ejom o treuzigellad
Beteg eur goz ostaliri
On dalhas a-zav eur pennad.

Er-mêz Yann Skouarnet a lip brouskoun,
E-barz, me a lonk gouzougad ;
Dond a ris ker reud, ker bouron,
Ma oen sammet ‘vel eur zahad.

²⁶ digabal : heb kabal.

²⁷ eur ribinadenn : **noten gand an embanner** : *Ribinadenn*, introduit pour faire le vers au lieu de *Ribinad*, qui signifie textuellement : bout de chemin en montant.

Distro d'ar gêr hep tamm irvin
Janed a ro din eur stavad²⁸
A dro raktal e dour va gwin ;
Kaoud eur wreg, ne deo ket ebat !

Mar bez gouezet e-barz ar vro
Em-eus-me bet eur javedad,
Da vorlarjez ar hiz a zo,
War eun azen e vin lakeat²⁹.
Staget e vezin war e gein,
War va fenn eur boned korneg.
E-leh brid e lost a zalhin
Evid ma vezi daoubenneg.

²⁸ stavad : javedad.

²⁹ lakeat : leoneg : lakaet, evid ar rim.

An delienn zeh

Distag diou ar wezenn,
Deliennig gêz melen,
Da beleh ez ez-te ?
N'ouzon. Eur barr arne
En-deus fraillet, torret,
Brevet ha diskaret
En eun taol an dervenn
A oa oh va dougen.
Abaoe an deiz-se
Ezon du-mañ du-ze
Euz ar grehenn d'ar hoad.
An êzenn, ar gaouad,
Va has ha va distro,
Gand he alan hedro ;
Morse ne ehanan ;
Gand an avel ez an,
Hep herzel, nag harpa,
El leh ma'z a pep tra,
El leh ma'z a ar gened.
Ar yaouankiz, ar sked,
An den braz, pinvidig,
Ar paour-kêz reuzeudig
Ar roue hag ar merer,
Tud ha traou, en eur ger.

Skeud ar vuhez

pe Klemmou eur mestr-skolaer

A-raog ma par an heol, moned hep sklêrijenn
Heb anaoud neb leh nag hent na gwenodenn,
Fazia. Treuzigellad, hag atao kamm-chilgamm.

Sacha gand poan e gorv e peb bro tamm-ha-tamm,
War ar penn, a-vagad, geled ar hroabrennou,
Kleved oh an dioukouarn strakal ar hurunou,
Kerzed heb ehana dre ar fank, ar vouillenn
Heb en em gaoud biskoaz evel-se digempenn ;
Dioh an noz difaziet, sevel euz e wele,
En em hourvez ennañ, ha kousked adarre ;
Setu war an douar buhez an den hed-ha-hed
Azaleg e gavell 'tre beteg ar vered !
Echu ar stal ganen, mond a ran evdi mad
Da lezel ar vicher a ra din kalonad,
Ha den war an douar a jomfe hep skañvbenn.

E-pad pemp bloaz, 'veldon da houzañv, da gelenn,
Eur seurt gouenn skolaerien a re³⁰ ar spered
'Zo moraillet ker stard ha dor kêr vraz ebed !
Bez mestr a garo, va harg a zilezan
Da neb oh he dougen a gred n'en-dezo poan.
Pa ven e-leh Regent galvet da brofesor,
Ar zamm 've re bounner, ne fell din neb enor.
Me da glev o lared, em gwad tomm birvidig,
Ne oar ket den perag ez on ker kizidig ;
Evid eur skolaer brell oh va lakaad pennfoll
'Pad eur miz hed-ha-hed e ran buhez fall d'an oll ?
Êz eo dit-te prezeg pa n'ah-eus tañveat³¹
Euz ar vestl a evan bemdez a-ziverad ;
Ma vijes bet 'veldon kaset da gelenna
Gand an drougeur gwechall 'veldon ivez brema',
Gouizieg e pep kentel, ha da galon rannet ;
Neuze 'z ajès da glask pell dioh diskianted,
Peoh hag ehan d'az spered ; setu perag ez an
Ahann a-vetepañs ha buanna m'hellan.
Mar deus c'hoaz skolaerien e-barz er skolachou
'Zo kel lemm o spered ha m'oa re o zadou.
Ar stered-se 'zo rouez ! stankoh e oant gwechall :

Ouz o hlask, va lagad a zo brellet ha dall ;
Ar sperejou forheg ne dint ken dibaot,
O gweled puill a reer 'vel trêz war eun tornaod.

³⁰ a re : a bere, er skrid orin.

³¹ tañveat : leoneg, evid ar rim : tañveet.

Me 'lavar 'ta bremañ, Kemper 'deuz en he hreiz
Brasa bandenn ezen a oufed kaoud e Breiz.

Euz a Gemper, me zoñj, ne fell din drougprezeg.
Neb am anev³² a oar ne garan kaoud abeg ;
Ne gomzan euz a zen nemed a skolaerien.
Gweled a reer ervad n'eus keal a vourhizien.
Daoust tud o-deus tres fall o klask skei flipajou³³
A embann e peb leh skolaerien er hêriou,
Euz o oll rebechou ne ran ket kalz a van ;
Neb a zo leal ha mad hep skor, n'en-deus krenvan³⁴.

Daoust d'oll zeodadou gand an Diaoul sutet,
Da skwer d'an oll gêriou, Kemper a vezo roet ;
Hekleo ar menezioù e bro ar Gerneviz,
A gan hag a gano meuleudi Kemperiz :
Buagle a galon, federed³⁵ heb o far
Euz ar re³⁶ ar brud ker skignet dre 'n douar
A lakay sebezet o oll nized yaouank ;
Kement-se 'zo anad evid peb den a skiant.
Nann, nann, ne fell ket din en eur zond d'o zamall
Lakaad gand skolaerien Kemperiz eur gabal,
Ha pa zeuan d'em glemm euz va deizioù divlaz,
Tenna war va zeulioù Kemperiz hag o chas ;
Diêz 'kavan gouzañv ar yaouankiz diroll,
Va skañbenni a ra gand e drabas pennfoll,
En eur vresad e deil e teu d'am stlabeza ;
Eñ a hell brabañsad ha me n'hellin skriva
Na teuler mar gellan outañ a daolioù pluenn
Ar hontamm flêriuz en-deus savet d'am fenn !
Va foell a zo torret, eur hloher didruez,
Kiger mar deus unan hag a verra va buhe
Gand ar zon euz e gloh a danflamm va fulor,
Am galv bremañ-souden da zevel em hador,
Petra 'welin em hlas ? Diaoulou dichadenet,
Ar re³⁷ evid tomma d'o izili skornet
A lamm, evel tirvi, war eur plankenn a-grenn³⁸,
A ruill euz eun toull kuz evel eur vouloudenn.

Hogen ma ne fell ket din diskenn eno ganto,
Va dorn em a-raog, ez an un den mezo`
O weled va hrenvan³⁹ va ezen o kabal
A-bouez o fenn warnon em laka da vlejal ;
En eur vond e krozan, va hribell ruz hag eeun,

³² anev : anavez.

³³ skei flipajou : **notenn gand an embanner** : donner des coups de houssine ou de cravache.

³⁴ krenvan : netra da grena.

³⁵ federed : **notenn gand an embanner** : *féderés, associés*, dans le sens de *fidèles*.

³⁶ ar re : a bere, er skrid orin.

³⁷ Ar re : pere, er skrid orin.

³⁸ a-grenn : a-rez an douar.

³⁹ hrenvan : trefu.

An tan a verv em hreiz, souden ‘talmo ‘r gurun,
 E fraillo ar goabrenn war ar chatal korneg
 Evid deski dezo da stanka kloz o beg.
 Raktal eur vogidell o sevel euz o zouez
 A voug krenn em gouzoug va hounnar ha va mouez ;
 Ne deo ket c’hoaz a-walh, ar boultrenn louz teñval,
 Ouspenn ma vir ouzin d’o gourdrouz, d’o grognal
 Bete poull va halon eet dre doull va fri
 A stambouh reud va hov euz eun eil dijunu.
 Evid va didana, eur hoz skolaer berrboell
 A halvan gand va biz da lared e gentel,
 A lavar en eur hrozmol :n’he ouzon ket, aotrou,
 Ha warnañ e tiskolo eur barrad pensomou⁴⁰,
 Eir hanfard all d’e dro ganen goude galvet
 En eur lakaad neuze e henou forn a-hed⁴¹,
 E patr avizetoh daoust ma’z eo didalvez
 Heb ober kammed treuz war-eeun, ‘lavar eur werz
 Hag a lavarfe diou heb beza re nehet.
 N’hellfe, fliper gwerziou⁴², paka e had war red.

Dibaot euz derou fall e han eun diwez mad,
 Ha talvoud ‘ra diskouez an nemorant timad ;
 Nann, nann, ne fell ket din e koz rimadellou
 Displega o zoniou, ker plên ha spanellou.
 Na nebeutoh da zen lared e brezoneg
 Penaoz e tiframmont Demosthene e galleg ;
 An doare ma kignont ar gregach, al latin,
 N’o lakaont da ouela pa vezont o c’hoarzin.
 Ya. Doue ra viro n’enuan neb am zelaou.
 En eur chaokad dezo kemend a ziotachou.
 Ar yaou⁴³ deut e tistard liammou va ene paour :
 Kuit ez an ‘vel eul laer tehet euz ar galeour⁴⁴ ;
 D’am heul neb ‘hello. A-dreuz dre ‘r parkeier
 E redan ‘vid pellaad diou laeron an amzer,
 Hogen reuz oh va chouk, kaer ‘m-eus mond d’an daou-lamm,
 Amañ, ‘vid êsaad o divreh reud nerzuz
 En-dro d’eur wezenn zero, kant skolaer gallouduz
 A bleg gand pouez o zoaz dre ‘n hanter he livenn⁴⁵ ;
 Klevit hi o voudal, torret eo ganto, krenn.
 Pelloh e-kreiz ar gêr, a-wel da beb lagad
 E par, en heol bero, neuerien a-vagad.

Ar re⁴⁶, e-leh kaoud mez, ‘ziskouez gwella m’hellont
 D’an oll dremenidi huduriaj divergont.
 En amzer ma vevom setu ar yaouankiz !

⁴⁰ pensomou : galleg “pensums“. : poelladenn-gastiz.

⁴¹ forn a-hed : digeri a ra e henou ken barz hag eur forn.

⁴² fliper gwerziou : an hini a zav gwerziou.

⁴³ Ar yaou : en amzer-ze ne veze ket skol d’ar yaou.

⁴⁴ ar galeour : ar galeou.

⁴⁵ livenn : eur skourr a-led.

⁴⁶ Ar re : Pere, er skrid orin.

Neb o gwel o hemer evid loened iskiz
 A vez en noaz grizill dastumet a-vandenn
 O vresa ‘mesk-ha-mesk ar fank hag ar vouillenn.
 Gand euz oh o gweled, ha me kuit eskraban⁴⁷
 En aon na daolfe Paol warnon e zaou graban
 Da hedal ma vo greet lezennou mad ha fur
 D’ober d’ar bouhed-se senti gwelloh o stur,
 Ha da beleh ez in evid gelloud tehed
 Eur wech ‘ta evid mad dioh o gouenn villiget.
 O niver a gredan ker stank hag ar raden
 A ziwan a bep tu, evid terri va fenn.
 A-zirazon o tond setu tri babor koant,
 Gand o magerezed deut deh d’o badiziant ;
 Gand kalz a rogentez ha gand o zreid korgamm⁴⁸
 E vresont stard an douar dre ne deo d’o genel ;
 Dreist barr uhel an neñvou he-devoe poan vugel,
 Al lugern a strinkont a zesk n’int a ouenn den•
 Unan a zo mestr braz : fich-fich e wialenn,
 Egile gwelloh c’hoaz gand bizied ivineg
 A dro e varvennou evel lostou killeg⁴⁹,
 A zav eur pouchad bleo war e dal da gribell.
 An trede anezo a denn euz e hodell
 Eur meleourig mistr en hini⁵⁰, war e veg
 Evel marbluñvennou, ar hêzig kêzoureg⁵¹
 A vousec’hoarz d’e gened ha war gein e fri
 E laka lunedou evid gwdell lugerni.
 En eur argouraoui or moutarded⁵² yaouank
 An eur n’he-deus o greet difazi, daoust ‘maint koant.
 Tavom war gement-mañ, eur pabor diempenn
 Ne deo nemed, hep skeud n’ez eus taolenn.
 En eneb da spered en em zao rendaeluz ;
 Petra ! a leverez, e fougerien lorchuz
 E penn ar re⁵³ n’ez eus nemed c’hwez hag avel
 Eo red din anaoud mistri vraz heb heñvel.
 Nann, biken, va mignon, ne gredin da gomzou.
 C’hoant va luzia ah-eus gand parabolennou.
 Anaoud mad a ran gouenn ar vrabañserien.
 Selaou, ma ve strillet bouedenn ar fougerien,
 Anezo oll, m’hen tou, ne hellfed ket tenna
 Empenn evid ober ar spered bihanna.
 Setu krak va hredenn, ha den a skiant ebed,
 Heb na drofe e wad, heb van ‘hellfe kleved
 Eul lakez o vlejal ‘vel e ra eun azen
 ‘Vid lakaad da hoarzin en-dro d’eur zoutanenn.
 Pe lezenn a ro pleg da roñsed ken dister

⁴⁷ eskraban : e tehan kuit.

⁴⁸ korgamm : dizneuz.

⁴⁹ A dro e varvennou evel lostou killeg : a dr e vourrennou evel lostou kigi.

⁵⁰ en hini : e pehini, er skrid orin.

⁵¹ kêzoureg : beg-melen.

⁵² moutarded : galleg : moutards.

⁵³ ar re : pere, er skrid orin.

Da galsk kavaill oh tud ha ne leveront ger ?
 Da ziskouez diwar-goust ar gwella bourhizien
 Eh uzont danvez koulz ha ma ra marmouzien,
 Evel kelien euzuz o gweler e peb leh,
 War Doue, war e zent o hlaourenn o diotaj ;
 Gournijal a reont beteg an ilizou,
 Enno e tispiegont o gwasu leuachou⁵⁴,
 Eun dorn war o livenn, eun all en o godell,
 E troont-disroont evel eur gornigell
 En eur deuler a-gorn war ar plahed yaouank
 Sellou flour ha treitour, sellou lik an êrouant⁵⁵.

N'heller dirag Doue sevel an daoulagad
 Heb gweled lakizien re striz en o dillad,
 Eur vez selled outo, n'eus forz peleh ez eont,
 Kement o-deveus skiant da ruzia a lakaont,
 Ne ouzont c'hoaz bale na chom war o hellou,
 Ne glaskont oh peb vad sevel o hribellou.
 Dre ma vezont lezet, re yaouank, en o roll.
 Kastizet anezo : ne vezint ker pennfoll ;
 Ya, kredi mad a ran evid o diarbenn
 E ve red kemered ganto eur geuneudenn ;
 Ha pa 'maint en oad da veza kelennet
 O freskata⁵⁶ bemdez e ve deread ha red.
 Kaer zo, ar yaouankiz 'zo leun a falloni.
 Hi 'zo penn ar furnez, skor ar filozofi ;
 Oh an dud a galon a vouse'hoarz gand truez
 P'o gwel war o daoulin a-zirag mestr ar vuhez,
 Bugale divarblu⁵⁷, filozofed gouezel,
 War or feiz vuhezeg, m'ho ped, c'hoarzit izel,
 En ho touez e klevan 'z eus eul lavar brudet,
 An dud a skiant, ridell o-deus mui a spered ;
 War gement-mañ, me 'gred den n'ho tislavaro,
 Me ho lez da gerzed, va list ivez d'am zro.
 Setu komz eun diskiant gand e zroug oll-dallet,
 Hogen eru gomz buaneg ne dle beza kredet,
 Rag, perag, m'her goulenn, pa wel eul labous du
 Eun hanter lakezenn⁵⁸ ne vlejfe diohtu.
 An eil hag egile d'e vicher ne dro kein.
 Ar beleg 'zo ar vran, al lakez azen brein.
 Ya, gwir a leverez, oll ez int diempenn ;
 Pa oe rannet ar skiant edont oh 'n em gempenn.
 Evel-se, kaer o-deus fistoulad, gouigourad,
 Boudal, blejal, bragal, distrei en o dillad,
 Dre ma'z eont, ma teuont, beg o skouarn difoupet

⁵⁴ leuachou : euz "leue" : traou sod.

⁵⁵ êrouant : **notenn gand an embanner** : naer ar c'hoant, le serpent de l'envie devient tentateur.

⁵⁶ freskata : **notenn gand an embanner** : *freskata* pour *freska*, sans doute rafraîchir.

⁵⁷ divarblu : divaro.

⁵⁸ lakezenn : **notenn gand an embanner** : Le texte porte *danizel*. L'auteur seul, sur d'autres points, surtout dans un genre aussi burlesque, aurait pu expliquer clairement ce qu'il a voulu dire, comme sur d'autres points, surtout dans un genre aussi burlesque. (amañ ; eul lakez).

A ziskouez sklêr d'an oll n'o-deus skiant na spered⁵⁹.
 D'or mignoned wirion, setu va frezegenn.
 Meur a dra dezo c'hoaz da lared a garfen
 M'am-bije netra ken da ober war an douar ;
 Pa'z int hanter-veulet ez an bremañ d'ar gêr.
 Kant gwech eüruz mar bez trugarezuz a-walh
 An neñv evid teuler diwar-benn gwasoh beh,
 Ha dirag va malvenn e-leh lakipoded⁶⁰
 Kaoud nep seurt êzenn all, me 'lavar likezed⁶¹.
 Va Doue, me az ped, taol diwar va diouiskoaz
 Eur zamm 'zo ker pounner ha m'oe gwechall da groaz.
 Avel al likezed a zistag va ene
 Dioh gwezenn ar vuhez-mañ, a-roag ma'z eo dare,
 Ma ne deuez abred da skoazia ahanon,
 E kollin va oll nerz, e semplo va halon ;
 Eul likez⁶² en-deveus galloud eur horrigan
 Evel deliou eflenn, p'her gwelan e krenan,
 En aon na ven gantañ skoet pe strobinellet.
 Eul likez ! eul likez ! az klevan o lared :
 Petra eo ar ger-ze, rag n'hen anavezan
 Ha kaer am-eus her hlask, e neb leor n'her havan !
 Evid hen deski dit, va mignon, selaou mad :
 Eul likez 'zo eul leue n'en-deus nemed daou draof
 An hini⁶³ deut d'e zeg vloaz a zilez e alar
 'Vid dond diwar ar mêz da haloupad dre gear⁶⁴ ;
 Pa vez war an treuziou e kemener d'ar mab
 Distrei e berr-amzer, fur-braz ha desket mad ;
 Etretant eun tad ker dre hwezenn ha dre boan
 A ved c'hweh eost founnuz en e zouarou bihan.
 Hag e vabig lard-teuh o c'hoari en dachenn
 A oar dindan eñvor pemp pe hweh lizerenn ;
 Teir nezerez ar vuhez, troit goustad hoh hinkin,
 Astennit ho neudenn – gand stoup ? Nann, nann, gand lin ;
 Likit hen, mar gellit da weled e gant vloaz.
 Aon am-eus n'oufe ket d'an oad-ze digeja c'hoaz.
 N'eus forz ! gan lien kuñv eo greet e gegelad.
 Tremen a ra peb deiz o c'hoari, o rohad,
 O teski e gentel, pa hell chom divorfil.
 Mar kendalh e vezo eur maout, eur gwall ibil !
 Mar gouez a-barz mervel, ervad, er bed-ma'
 Ez aio d'ar bed all evid deski skriva.
 Doue d'her hemero ha r'hen diwallo mad !
 A-walh euz ar seurt-se a vrell va daoulagad !
 E-touez al likezed, ker stank hag ar merien
 Ez eo red lavared ez eus a nousped gouenn,

⁵⁹ n'o-deus skiant na spered : **notenn gand an embanner** : Texte variante : *ez int ezen korneg*.

⁶⁰ lakipoded : **notenn gand an embanner** : pe "lakepoded".

⁶¹ likezed : tud al Likez (eur skol e Kemper).

⁶² likez : unan a zo el Likez.

⁶³ An hini : pehini, er skrid orin.

⁶⁴ dre gear : leoneg : dre gêr.

N'o gweler ket bepred dastumet a-vandenn
 Gand al leou, o breudeur, o skrabad an dachenn ;
 Na pa zegouez an dud d'o lakaad en o renk,
 O kerzed ken mibin, o skuba nêt an hent ;
 Daou 'm-eus anavezet ha ne oant daou vogel,
 O-deus troet *asinus* e galleg 'barz mervel ;
 An daou spered lemm-ze a vezo roet da skwer
 Bete diwez ar bed da likezed Kemper ;
 E lizerennou aour o ano 'zo skrivet.
 E kêr Lambezelleg unan a oe ganet.
 A beleh egile ? Brud anezañ 'zo c'hoaz
 Gand gwrahed koz Gouenou ha gand re Wipavaz.
 Mantret-oll on ganto, ha pep tra 've gwelloh
 Evel pennou chatal ma vent kaset pelloh
 Da jom war ar mêz o labourad an douar.
 An arhant 'zo kollet oh o beva e kear⁶⁵ ;
 Evid ober pep tra hervez ma'z eo deread
 En o zouez e tlefe ivez lakeat⁶⁶
 An diota skolaerien, o rei ar renk kenta
 D'ar re a vez outo kavet an heñvella.
 Setu, a livirit, komzou 'zo diod-meurbed.
 Hepto petra 'rafe ar Rejanted ?
 Penaoz 'hellfe beva gouenn naonieg ar vistri
 Ma ne ve likezed da rei dezo da zebri ?
 Ha da betar diviz na peseurt levenez
 Pa welfes dilezet douar an deskadurez ?
 Dre ar bed oll, pa vez ganez skignet ar haoñ⁶⁷
 Ar vistri dioh an druill o vervel gand an naon,
 Hga ar steriou arhant o ruilla e peb Leah⁶⁸
 Nemed er skolachou a jomfe a-zizeah⁶⁹ .
 Prezege enoëuz, m' am hredez, ahann pell
 Ez i d'ar c'hwiled dond da lared da gentel,
 Pe brim ar fouet lostou⁷⁰, o hovou flask ha moan
 Warnout en eur fromal a zaillo 'vel gwenan.
 Setu kuzul aonig eur mignon digalon ;
 Bez' eh hellont doned d'em zidana warnon ;
 Aze 'z eus treujennou⁷¹, va diskoaz 'zo en noaz,
 Ra skoint nemed raktal ez aint ahann er-mêz.
 Nann, nann, p'en em zoñjan, ra chomint en on touez.
 E skol diskianted ar furnez 'zo frouez ;
 Lezom i da goza war bouldrenn koz levriou
 Evid ma tastumint da gant vloaz bokejou ;
 Oh o gweled, me 'zo ker skuiz ha ker nehet
 Ne houlenan mui seurt nemed ahann tehed

⁶⁵ kear : leoneg : kêr.

⁶⁶ lakeat : leoneg : lakaet.

⁶⁷ haoñ : hañv.

⁶⁸ Leah : leoneg : leh.

⁶⁹ a-zizeah : leoneg : a-zizeh.

⁷⁰ ar fouet lostou : ar re vriz-gouizieg.

⁷¹ treujennou : **notenn gand an embanner** : Treujennou désignent ici de vieux troncs de chou-vache que l'on met à sécher à Roscoff pour faire du feu, faute de bois.

Euz va zoñj birviken, nann, nann, ne zispegin,
Hag evid kaoud peoh d'am fenn, pell diouto ez in.
Diêz-meurbed eo beva gand gouenn ar skolaerien,
Kenavo, micher fall, ha c'hwi, bandenn ezen,
Ma tistroan-me biken da zoned d'ho kelenn
Kant feder⁷² a dalvo deg soudard pe ouspenn ;
An dañserzed oll a vezo seurezed.
Bemdez da deir overn ez ay 'n alvokaded.
Al likezed neuze gand o deskadurez,
D'an dud a spered lemm a roio kalz enkrez
Ha kribell pabaoured⁷³ sonnet war o fenn
A ziskouezo d'an oll o-deus bouedenn⁷⁴ ouspenn !

⁷² feder : federell.

⁷³ pabaoured : pabored.

⁷⁴ bouedenn : bouedenn-benn.